



BREZHONEG ER FAMILHOÙ

17 - 23 a viz Gouere 2016 e Kastellin

Brezhoneg er skol zo mat, met er gêr e chom e toull an nor re alies, ne dremen ket treuzoù an ti.

Fellout a ra deomp skoazellañ an tadoù hag ar mammoù a oar brezhoneg un tamm ha ne gredont ket ober da vat ganti er gêr c'hoazh.

Degemeret e vo kerent gant o bugale dindan 6 vloaz. An dud divugel er mare-mañ met c'hoant enne da zesevel o bugale e brezhoneg a gavo o flas aze ivez.

Labouret e vo e prantadoù berr, war demoù tost ouzh ar vuhez pemdez ; aozet e vo pourmenadennoù, c'hoarioù a-stroll, desket kontañ istorioù ha rimadelloù kanaouennoù ha labour-dorn. Bez 'vo prantadoù hep ar vugale ivez. Kemer a raio perzh Divskouarn evit mareadoù pleustriñ hag eskemm war danvezioù teorikel gant an dud deuet nemetken ; prantadoù all a vo evit deskiñ kanañ, dañsal ha c'hoari holl asambles.

E Skol-Hañv KEAV, en em gavo stajidi ar rummad "Brezhoneg er Familhoù" en ur bed brezhonegerien, lod anezho a vo gant bugale desavet e brezhoneg, lod all o devo skiant-prenet war an dachenn-se. Ar gwellañ endro eo evit reiñ kalon dezho ha sikour anezho da gas o raktres betek ar penn.

Evit gouzout hiroc'h, deuit e darempred gant KEAV

keav@wanadoo.fr - pgz 02 98 95 59 31 - 06 06 45 85 08 - keav.bzh